


DIUGAN GWIKLAN



War don : *Lazet ar iar gant ar falc'hon*

Klevet a ran *An Délen dir*
 O sôn war lein ar ménéziou,
 Goudé klevet hirvoudou hir
 O sével noz-dé er c'hoajou.

Respont 'ra télen c'hary ar môr
 Da délen vurzuduz ar c'hoat,
 Ha c'houistel ar c'hévélek-vôr
 Da c'houriziou ar gazek-koat.

Etré Karnak hag ar Porz-Gwen,
 Dré brukou ruz ar Méné-Bré,
 En pép traoien, war bép kréc'hen,
 Armé Gwiklan a zo daré.

Sevenet eo, heuzuz Barz dall,
 D'az peurvuian diuganou :
 Ar gwad kristen, en eur ruihal,
 En deuz troet ar milinou.

Hag an douarou ar fallan
 A ro gwinniz 'vel a ré vad ;
 Mémez dispriz a zo bréman
 Evit an douar hag ar gwâd.

Hépdale 'vo trubuilh en Breiz :
 « Pa zavo Gwiklan euz he vé,
 Diwar lavar Pédernegiz,
 E vo brézel-veur en dé-sé ».

Aboue eun nebeut bloaveziou
 Iné ar Barz, 'n em lodennet,
 A roé nerz da galonou
 Ar Varzed vihan 'zo zavet.

Pép-hini dougé hé délen
Etre Bro-C'Hall ha Breiz-Izel,
Euz en denna diouz ar c'herden
Meulodi broïk he gavel.

Mez an holl délennou bréman
O deuz unvaniet ho zon,
Pa o deuz bugalé Gwiklan
Eur ménoz hepken 'n ho c'halon.

Arru eo 'ta dé ar brézel ;
Kréna 'ra douar ar Park-Braz,
Rag sethu Gwiklan o sével
Da réna kann an Enez-C'hlaz.

Tré Traou-Yeodi ha Louargat,
Dremdost d'ar méné, war an hent,
Er steriou e ruilho ar gwad
Vel a ré an dour diagent.

Ho ! nag a c'harm ! nag a derou !
Ho ! nag a ganvo en pep léac'h !
Nag a gorf en Karr-an-Ankou !
Bepred trugarez ! Breiz 'vo tréac'h !

Biken goudé na vo brézel,
Hag ar peuc'h a réno dré-holl ;
Hadsavet e vo Breiz-Izel,
Sturiet gant ar gwella reol.

Breiz-Izel 'vo an uhela
Dimeuz broiou ker an douar :
An holl inéo vo en joa
An holl galono hép glac'har.

Zav 'ta buhan war Méné-Bré,
Barz-veur Gwiklan, Diouganer !
Hir eo gortoz beuré an dé
N'hon bo 'met Doué vit réner.

ERWAN BERTHOU.